



1012 C

BUEZ EUR PAYANÈS
EN EM GRAT BELEC

HAC EVIT PUNITION

A ZO BET DEVET E ROM

Var eun ton Nevez

TAD ETERNEL, Roue ar gloar,
 Ker koulz en enf 'vel en douar,
 Reñt sclerijen d'am speret,
 Da ziscleria ar malheur c'hoarvezet

Speret Santel, me ho suppli,
 A c'hui ive Guerc'hes VARI,
 Dr reñ dime hoc'h assistañç,
 Evid galloud en em avanç,

Da reñ sclerijen d'am speret
 Da dreñ ar gallec en brezonec,
 Da ziscleria d'ar gristenyen
 Ar vroec a Jucquetan, certen,

Ar c'hossa dèn zo biscoas bet
 En deveus james en clevet,
 Evit kement a zo passeet,
 E vije bet eur *Plac'h Belec*,

Pehini zo bet pevar bloaz anter
 O vinistra Corf hor Zalver :
 Eun dra a na verite ket
 Nac hi na femeulen ebet.

Breman, christenyen, e commañçan,
 Discleria dec'h ar vuez man :
 Homan a oa ganet en payanes,
 Er mes demeus ar gristenes.

En iaouankig abandonet,
Gant tad ha mam dilezet,
'Vit commanç e buez prestik
En em viskas 'vel eun Ermit.

'Vel eun Ermit en em viskas,
Evit commanç e boët da glask;
Poursuiv e hent gant dilijanç
Ec'h erruas souden en Franç.

Erruont a eure hep retardi
E kichen ty markis Tollery;
Ar varkisez 'vel m'en goelas,
D'e vlac'h a gambr e lavaras :

— Buana ma c'helfet, emeti,
Groët d'an Ermit antren en ty. —
An Ermit en ty antreet,
Ar varkises n'eus saludet.

Pardon en devez goulennet
Eus e hol offansou gret;
D'ar varkizes, a wir galon,
Laras oa payen an nation.

Ar varkizes, 'vel m'en clevas,
Outan souden a c'houlennas :
— A c'hui a ve contant, emezi.
Chom eun neubeut ebars em zy. —

— Me c'houlen pardon, emezan,
Eus ma offançou bras kentan.
Hac a chomo en o reket
Moyennant vezin badeet.

Er memes amzer ar varkizes
An otrou markis assambles,
Gant solennite certenamant
A eure ober ar vadeyant.

Beza int bet, a wir galon,
Ar maëronez hac ar paëron;
Souden e zeo bet kasset
Da studia ha gret belec.

Goude ma zeo bet belleguet,
En pat pevar bloas eo chomet
Ebars en ty en o servich,
Oferenan bemde en o ilis.

Ar pevar blaves passeet,
Laras d'ar markis eun devez :
— Ma pe ar madeles, emezan,
Conje ouzoc'h e c'houlennan. —

Ar markis hac ar varkizes
Carguet cals a dristidigues,
E c'honje dezan o d'eus roët,
O c'houlen outan ar sujet.

Ma fillior dime e leverfet
Petra signifi ar sujet
Ma deuit da guitat on ty,
Er fesson-man d'on abandonni.

— Abaoue ma meus bet ar sclerijen.
Hac an ano a vir gristen,
E meus gret ar brossesse
Da vont da visita eur 'bê,

Ini ma Zalver biniguët,
Dre e graç mar am permet;
Hones eo an occasion
Ma o kuitaan-me, ma faëron.

O vezan clevet ar reson,
Gant joaustet en o c'halon,
En em gueljont o daou contant
O reïn dime tregont pez arc'hant.

Commanç a ris me ma beach
Er fesson a pelerinach,
Ma zoun bet en em rentet
En ty an Itron Varia Loret.

Antreet ebars en ilis,
A celebret ar sacrifis,
O sortial goude timat,
Ezoun erruet ebars en Napl.

Hep arreti en nep andret,
Kichen ar Montagn zoun arruet,
O vezan surprenet gant an nos,
Hep gouzout pelec'h mont da repos.

E zoun arruet, gant graç Doue
En kichen ty an otrou Cure,
En eus sur mad va recevet,
O sonjal e voan eur bellec.

An deñs varlerc'h mintin e savis
Evit celebri ar sacrifis,
Goude fin ar venediction,
E ris ive instruction,

Dre pehini e rentis contant
An ol kement a voa present,
A eur voues tout e c'hejont
A d'ar C'hure e leverjont :

Va fedi mar pliche gane
Da ehom eno neuze gante ;
Ar C'hure contant couls hac int
Zenas neuze da c'houl ouzin :

— Contant e vec'h, bellec yaouane,
Dam servicha fidelamant. —
E c'houlou dezan meus accordet ;
C'huoc'h mis e meus an servichet.

'Vel voa ma musur ramplisset,
Er fin c'houec'h mis meus avouet ;
E meus lavaret d'ar C'hure :
— 'Voan fumellen en guirione. —

Ar C'hure evel man glevas,
Estonet bras en em gavas,
O veza incredul anezan,
'C'heure dioc'h-tu ma bizitan.

Ober ma c'habilla en fumellen
O lavaret dime evelen :
— Sortiet, emezan, eus ma frezang
Rac da Zoue eo bras an offang.

An offang o c'heus cometet
Dre o faos sacrificou gret. —
Kent evit monet em zro,
E c'houlennis ma papero.

Ar C'hure din en deveus lavaret :
— Evit ho papero no pezo ket. —
Dre promptitud a dre valis
Tri fol contel dezan rois.

Souden neuze 'voent kemeret,
A d'ar prizon 'voent conduit
Evit soufr ar bunion
Ebars er guer eus a Rom.

Ma froses a voe gret buan
Da veza lesket gant an tan.
En punition d'am pec'het,
A d'ar muntr infam am boa gret.

Araoc mervel e c'houlennan
Pardon ous Doue da gentan,
'Memes amzer ous ar Verc'hes,
Ous an oll Zænt hac an Æles

Demeus ma oll sacrilejou
Meus cometet em sacr'fisou,
A goulen er memeus instant
Ous kement den a zo presant.

Da cavet sonch eus ac'hanon
Ebars en o oll bedennou,
Da bedi Jesus hac ar Vere'hes
Da gavet eus ma inc truez.

C'hoas e c'houlennan digant Doue
Da guement glevo len va bue,
Ma vezint inspiret neuze
Evit delivranç d'am ine.

Da laret eun *De profundis*,
Peden ordinal an llis,
Evit delivranç a memor
A Ineo ar Purgator.

Peb a *Bater* hac a *Ave*,
A *Requiescat in pace*,
In Manus tuas, Domine,
Doue da vezo gant ma ine.

AMEN.

Propriété de l'Editeur.

